

244

554

KLEMMOU

EUR PLAC'H MANKET

Var eun ton triest.

136

Selaouit breman va mouez, va c'hamaradeset,
 C'houi pere em yaouankis, a meus bct kals karet,
 Eus a Doulic ha Ludu, me ra deac'h ma c'hlémou,
 Deut hell assambles gan-in, da veska ho daëlou.

Me a meus kolet breman va reputation,
 Va c'halon a zo karget, ha zczolation.
 Dre ma meus kradet siouas, va faos kamaradou,
 E meus kolet er c'haëra, démeus va bokejou.

Beteg breman me o'halle, laret a voues huel,
 E oan kæra fumelen hc oa e breiz-Izel.
 A breman me zo udur e toues an holl verc'hei,
 Pa eo va c'hæra bouket, sioas gan-in kol-t.

Henez oa kæra tenzor, e oa bars er bed-man,
 Ne kavin kct heneb leac'h, da brena seurt dezan,
 Dre yeza deut da gredi kamaradet treitour,
 E meus lezet va boket, da vonet gant an dour.

Pa deuan d'examina, ar voul roud deus ar bed,
 Siouas me vel varnezhi, breman kals a vera'het,
 Pere zo kollet gante, kouls a me ho rozeu,
 O veza deut da fiout, en comzou treitourien.

Va holl gerent zo siouas gan-in dizonoret.
 Va chans a zo dinatur va flaneden kollet,
 Va c'halen zo en irvoud, kouls en noz vel en de,
 Me a c'houlen ar mare, vit diskenn bars em be.

Goude va fragilite, mo zo holl ankenfet.
 E compren bar er stad-trist, e pehini on rentet,
 Beteg breman me meus bet, douget kokardeno,
 Breman e m'eus eur bisac'h, eur vas da vout en dro.

Beteg an oad uguent-vloaz, me a meus bet bevet,
 Ebars e doujans Doue, evel ma vez gleet,
 Neuze mea o karet, gant holl em e'hanton.
 Neuze kamaradezet, oa laouën va c'halon.

8

Goudé ne meus bet heuliet, kouis en noz vel en dé,
 Ar gwel kompagninez, a zo bars em c'hontse,
 Dre-se ne zo mepriset, ebars en Breiz-Izel,
 Va evructet er bed-man, za eet gant en avel.

Ne meus ket heuliet siouas, avis tad na mam,
 Dré-se ne meus kot gallet, bêva ive diviam,
 Greet é'meus skouarn youzerd, pa gleven anezhe,
 Koulskoude deus bet laret ar wirionnez din-me.

Lavaret zo bet din-me gant-he sur aliez,
 E heul gwel kompagninez, mije tristidigez,
 Mes dre ma oan é'hoas yaouank, veprisen he c'homzou
 A ze ra din-me breman skuil eur mor a zaolou.

Ma mîse bet o c'hredet, heuliet ho gourc'hemen,
 Va'buez, kamarrdezet, a vije bet laoën,
 Mes pa ne meus ket sentel breman demeus ar stor,
 Allas vit deus ar garek, e rankiu ober zur.

Noz a de he m'hon en eur stad trist meurbet,
 Awichou me eun tam da zebri, gweach all ne me ket,
 Goudé ma ve erc'h a scorn, ha ienn bras em avel,
 Keuneud ne mo ket d'ober tan da doma var bugel.

C'houi va c'hamaradezet, goude va oll anken,
 Deuio c'hoas d'an goapaad, gant eur galou laouén,
 Mes mar kemerit an heut, on pehini zo dangée,
 C'houi a pezo evel d'hou da zougen, bêc'h pouner.

Allas kamarrdezct, daou hent zo er bed-man,
 An hini gemer an hent mad, deus de zougen bec'h skan.
 N'hep gemer an hini fall, bale war va roujou,
 Deus eus pouner pa zougeu, ha kals a dourmanehou.

Vit war va choak breman, a zb eur bec'h pouner,
 'Hag a meus deus e zouguen, kals a hoas a miser,
 Dalc'het vezin d'er dougen beteg fin ma deiou,
 Adieu 'ta d'am yaouankis, ha d'am plijaduriou.

Louis Le Brun.

(Propriété de l'Auteur)

Brest, Imp. Le Bozec, à Coat ar Guéven